

Sôn ar Goulen-Eured

Kân-bale Tregeriz Gwingamp.

1

« Bonjour, bonn' femm' roit ho merc'h d'in, oh ! (*bis*)
Bonjour, bonn' femm' roit ho merc'h d'in, } *bis*
Nè vo ket maleurus ganen.

2

Me zai d'ar park da labourat, oh ! (*bis*)
Me zai d'ar park da labourat } *bis*
Hi jomo 'r gear da luskellat.

3

Da luskellat ha d'ober tan, oh ! (*bis*)
Da luskellat ha d'ober tan } *bis*
Da doma iod d'an hini bian.

4

Me vo kountant 'fin ar sizun, oh ! (*bis*)
Me vo kountant 'fin ar sizun } *bis*
Me c'hellan kaout va zam butun

5

Eun tam butun ha dek guenneg, oh ! (*bis*)
Eun tam butun ha dek guenneg } *bis*
C'houlennin ken digant va greg.

6

Ha me vo fur betek mervel, oh (*bis*)
Ha me vo fur betek mervel, } *bis*
Ma c'hellan kaout ho merc'h Katel. »

7

— « Va faotik keaz, va merc'h Katel, oh ! (*bis*)
Va faotik keaz, va merc'h Katel } *bis*
Nè vo ket roet d'eun den diboell.

8

D'eun den diboell, d'eur feneant, oh ! (*bis*)
D'eun den diboell, d'eur feneant, } *bis*
D'eul lounker chist ha gwin-ardant

9

Ar bleo zo savet en da zourn, oh ! (*bis*)
Ar bleo zo savet en da zourn, } *bis*
Kea d'ho rosti 'barz eun ti fourn.

10

Da c'hodellou zo goullou-sac'h, oh ! (*bis*)
Da c'hodellou zo goullou-sac'h } *bis*
Kea d'eul leac'h all da glask eur plac'h.

